



fa 184r

Ne velot morze
En Franç nac e lec'h all.



Ar Roue HERRI
A vœa eur pot dious-tu,
A garrie hardi
E JANNED ha guin tu,
Hac o combati
A vouie cregi dru.



E creis ar gombat
E comzas evellen :
" Dalc'hit ho lagad
" Var va flumachen ven,
" Sur eo d'o laqas
" Bepret er guir rouden. "



HERRI a garrie
An dud divar ar mœz,
Hac a reqete
M'o dije bep sulver
Yar er pod deze
Da zebri en oêz.

Jan 1853**HERRI-PÉVARE**

N'en deo get maro c'hoas,
Rac e Vugale
E lignes hac e raç
Zo leun a vuc :
Graç deo da chom mil bloas.



Mar distro bigen
An diaoul da c'hoari vas,
Prest omp da zouten
Ar Roue en e blaç,
Ha prest ha laouen
Da rei peb a dol bas.

FIN.

E MONTRoulez, e ti LÉDAN, e traon ru ar Vur.

